



SKRID
II

S K R I D

niverenn II

miz Mezheven 1977

BREMAIK E NOZO	Youenn Drezen
MINTIN WAR AN ERIN	Youenn Drezen
NEDELEG E MIZ EOST	Brenniger
PERC'HENN WAR BEP TRA	Leonard Cohen
PEP TRA	Joan Loïs Racochot
KONTADENN AR WEZENN RUZ	Olier ar Mogn
DAEL AN ELESTRAN	Yann Gerazern
SKRAPADEG AVALOU TREOUGI	Youenn Drezen
TRESADENNOU	Yec'han Dominig Olier
SKOL AR VUHEZ	Yec'han Dominig Olier
EVELINE	James Joyce
TAOLIT KUIT PEP TRA	Joan Loïs Racochot
MARC'HAD LANUON	Josette ar Meur
KALON ER-MAEZ	Sergi Bec
AN TOUSEGI	Jakez Riou
SUSINIO	Youenn Drezen
LENNEGEZH VREZHONEK HA LENNEGEZH VREIZHEK	Trevidig
DIVENT EO AR MOR	Graeme Allwright
AR SNIPER	Liam O'Flaherty
PROF	Leonard Cohen
TARZH	Kristian Giraudon

Priz an niverenn-mañ : 8 lur

SKOL OBER

D'an 31 a viz Genver 1977, e oa enskrivet e SKOL OBER hag o heuliañ ar c'hentelioù :

- 768 skoliad er skol izel.
- 80 skoliad en eil derez.
- Ur 15 skoliad bennak en trede derez.

" CRASH-COURSE "

Abaoe daou vloaz e vez graet, e Skol-Veur Breizh-Uhel, Roazhon, ur sizhuniad studi brezhoneg evit an holl liveoù. 8 eurvezh kentel dre zevezh. Lojet ha maget e vez ar skolidi e tiez-lojañ ha tiez-debriñ ar studierien. Bep bloaz e ranker nac'h degemer tud. Hevlene e vo graet ar skol - digor d'an deraouidi evel d'an dud barrek dija - eus ar 4 betek an 9 a viz Gouere.

Diskleriadurioù digant :

Semaine Intensive de Breton
Formation Continue
Université de Haute-Bretagne
Avenue Gaston-Berger
RENNES - VILLEJEAN

Renet eo ar c'hentelioù gant Per Denez.

BREMAIK E NOZO

Bremaik e nozo. Kemeromp ar vag.
Hag e weli, Mani, gant tizh ar mor,
Hag ouzh hiboud an houlenñ voull ha glas,
O vont e-biou, ken mistr, gwez-pin an aod.

Setu ma tigor aveler an oabl ;
Gant seiz e goumoul hag e avel vlot
E flour goustad enezennoù a-stroll,
Trelatet 'veldomp gant lusk al lano.

Luskell da garidi, gwele arc'hant !
Ha te, Mani, gra din allazigoù !
Netra ne dalv, henoz, añ da ziweuz.

A ! bevañ, karout a-unan ganit !
Ouzh skin ar stered o tridal en dour,
Evañ yaouankiz e stivell da sell !

Youenn DREZEN

MINTIN WAR AN ERIN

Kaniri 'z eus gant an tarzhig war e vili.
Lirzhin eo ar mintin ha sklintin an erin.
- Mani garet, ken gwenn ha flour da izili,
Klev tirili an alc'houeder en oabl livrin.

Sin eo chourig an aer, e-giz dour er c'hili,
War hun difiñv an Atlantel hag e gevrin,
Ha yaouankiz an heol a lufr e askilli
War hun ar mor, etre kornog hag an aod krin.

A joa ec'hon ar mor hag an heol, bam hor bro !
C'hoarzh an avel, ken sart, o vrudañ tro-war-dro,
Nevez atav, lid diziwezh o dimeziñ !

Ni, 'vat, ne vrago ket hor yaouankiz atav !
En em garomp timat, bevomp hon eurioù brav,
Hep mui gortoz listri neñvel an Inizi !

Youenn DREZEN

NEDELEG E MIZ EOST

Den o teuziñ harpet ouzh moger ar mirdi, bez habask. Den teuzet, devet, drailhet ha bruzhonet, ro peoc'h ha chom habask. Ne deo c'hoazh nemet nav eur. Sell ! Emañ an noz o tont tamm ha tamm... Ret e vo gortoz c'hoazh un tachad. Pa vezo stignet ha fichted mat ar ouel zu a-zioc'h d'ar gêr vras, 'benn neuze e c'hellimp mont... Sall ! Me 'zo heñvel da c'haouzhit... Sellet a ran, me ivez, ouzh va daouarn sounnet er voger vrein... Ar gwad a zic'hast din va c'hroc'hen... Gwelet a ran emaut aet skuizh o c'hedal, gant da c'hlann o torchañ ar mogerioù lart... gant da dreid laoñennet... Gortoz, 'lan dit ! ha losk an dud da vale en da gichen... Skleurioù diwezhañ an abardaez a lip o fasoù tagnous. Iskis int gant o c'hammedoù bras. Sellet a reont pizh ouzh an douar. Dallet int gantañ, moarvat. Heñvel awalac'h outañ, kea... Spesoù an abardaez.....

Tostaat 'ra an eur met ret eo gortoz c'hoazh. Pa vezo bet lac'het ar gouleier aze, e c'helli mont d'ober un dilañs-bragez e-kreiz ar straed, ma kiri. Mes bremañ, gortoz... Del, selaou ac'hanon... Ne gontan ket krakoù dit... Selaou 'ta... Ahount em bro, ez eus ur vaouez kozh anvet Chann. Heñvel awalac'h eo ouzh meur a Chann all gant he sae zu, he c'hein kroummet, gant he c'hoef bouchig gwenn o pouezañ war he

dremm askournok ha roudennet... Gwelet 'vez alies a-hed an aod diouzh ar mintin... O klask peñse... An tamm maouez-se, dilavar, ken bihan war an traezh 'traoñ ar c'herreg... He saludiñ 'reer en ur vousec'hoarzhin... :

- Ata Chann, abred oc'h adarre ! N'hoc'h ket rivet ?

Pe :

- Pilet dac'h ho kwele, mamm-gozh ? Che ! Pebezh planken !

An hini gozh ne ra van, mont a ra pelloc'h en ur strechal... A-wechoù memestra, hep tennañ he selloù a-ziwar ar mor, e kred respont un dra bennak... - Piv oc'h ? Ne anavezan ket ac'hanoc'h... Doue d'ho pennigo ! Hag ez a war he fouezig o voustrañ ar bezhin-torr dindan he bouteier pounner, un tamm koad pe un tamm lij ganti 'n he c'hrabanou. N'eus nemet ar gweltrez a c'hellje he lakaat da chom a-sav. Ne c'hell ket gouzañv anezho hag e kav gwelloc'h sarrañ he daoulagad pa deu ur c'hrank glas da ruzañ an traezh dirazi... Drebet o deus daoulagad he breur, dek vloaz 'zo...

Hennezh 'meus bet anavezet ivez, peogwir e oa amezog din. Kaour... Kaour... "ar gouez" a veze graet dioutañ... Bevañ, pe evañ 'rae kentoc'h gant e bried, Diel, en un ti-soul war bord an hent pras, just 'kichen radenog Li an Ogor...

P'edon yaouankoc'h, gant lañfridi all ar c'harter ez aemp alies da deuler mein ouzh ar prenestr bihan... :

"Kaour, Kaour
Gwin ar paour
Kaour, Kaour
Gwin hep saour"

ha trouz ar vein o strakal ouzh koad kalet an nor a zassone en ti 'lec'h ma ne glevemp nemed roc'hadennoù ar mezhier ha tufadennoù e farez, o daou atav 'en mezh... Belkoù 'vehe ganto lies, neuhe pebezhe cheuleuvari !!! Puten c'hast ! Pegeit 'z eus dac'h an dra-he dija ?

Diel 'zo marvet da gentañ... Ar gwenn mud, hervez lod eus an dud, ar roum hag ar gwin, ar boan hag ar vizer hervez lod all... Korf Kaour 'zo bet kavet en aod war ar bili, un nebeut mizioù dac'houde... dindan ar c'hore... Paneved d'e gasketenn vortolod bet chomet war ar c'hal, ne vije bet den ebet o klask intent ahoutañ... Ar c'hranked o doa drebet e zaoulagad ha krog mat e oant en e vouzelloù... Mardouan ! Selaou 'ta ! Klev ! E gorf 'zo o pilat dac'h laez ar c'hal... Ya, selaou... Pilet eo hag e tarzh hag e flistr hag ar c'hourgouilh ar c'hig brein war ar vein... E vlev gwenn 'zo dispaket war ar glannour hag ar pioka... Memes kloc'horennoù ar bezhin du e strink ar gwad diouto... Un nozvezh 'vel houmañ... du ... Du ...du... met ne c'helles ket kompren, re a bres 'zo ganit ? Gortoz... Gortoz.....

N'am eus ket soñj piv a zougas an arched d'ar vered. Gwazed Kervelogan, vasil... Kement a wazed a oa eno d'ar poent-se... Kement a vezhinerien hag a besketaerien a vehe bemdez o skrabañ an toulloù traezh hag ar reier...

Tud... Tud... Tud yac'h. Gant o gouezoni hag o madelezh... gant o mouezhioù rust hag o c'hanaouennoù... gant o c'hoarioù feuls... gant o devosioun druezus a loened skourjezet ha gwallgaset... Marv an darn vrasañ i'e... Met selaou a rez pe betra ? Pa sellan ouzhit-te, ahe, gant da benn troujal, e rankan anzav e tennes un tammig diouto... Mes, Chann, Chann...

Mezh 'vez bemdez. D'ar sul, warlerc'h an overenn ez a da evañ daou pe dri c'hartad gwin en ostaleuri war ar blasenn... An ostizez a servij anezhi he-unan, peogwir ar plac'hed yaouank ne intentont ger ebet dac'h he lañgaj. Hag e chom ahe azezet en ur c'horn, gant he muzelloù o pateriñ hag o nosteriñ hep paouez. Dac'houde merenn - patatez-fourn d'ar sul gant ti 'toare - e ya d'ober tro arvor ar barrez, wigoù-wiga, o chilgammat dre an hentoù-karr, o vranisigellat he femp lur war'n ugent e peb rolloc'h a vez eno... Avel... Skourn... Kazarc'h... N'am eus morse gwelet an disterañ mimi ganti en-dro d'he gouzoz treut...

Met buan ez a he gwenneien 'kuitez diouti ha neuze, va faotr, selaou 'ta, neuze e krog da ganañ en tavarnioù da lakaat ar wazed da baeañ roum dezhi... " Nouel, Nouel, Nouel da Jezus " e kan hi gant he ginoù tort... " Nouel, Nouel " eme Chann... Morc'hast ! Hag e kan al loudourenn gozh... Ha c'hwez ar roum ganti c'hoazh... ha tout an dud oc'h ober an heg ganti, p'emañ hi, martrehe, e penn he zalaroù. Selaou... Ya, selaou... Eviti e rimp hirio ar pezh a rankomp ober... Nouel ! Ya, eviti

e vo lidet emberr un overenn a c'hiz all...
Sall ! He anv 'zo aet da stekiñ ouzh an neon.
An arc'hant 'zo en he c'hrabanoù... An dir 'zo
dindan he boutoù... Nouel ! Stign da laoñenn.
Ha deus ganin, kar bremañ eo pase poent... Tud
o tont... Va c'hroc'hen a sant anezho... Rodoù
houarn va empenn zo krog da yudal adarre...
An noz n' o laero ket diganeomp... Nouel !
War velum Chann gozh 'meus lemmet va c'hontell.
Nouel ! Selaou, va breur, ha sell : ne zeves
ket ken, ne deuzes ket ken, da vrec'h 'zo
kreñv... Nouel ! ... Nouel !.....

(17 a viz Kerzu 1974)

Leonard COHEN

PERC'HENN WAR BEP TRA

Evidoc'h em eus lavaret e kanin meuleudi al loar,
e tisplegin pe liv eo ar stêr,
e kavin gerioù nevez evit envel hirnez
ha marzh ar skreved.

Peogwir oc'h tost ouzhin,
peogwir eo tost ouzhin kement tra a ra,
a sell an dud, peogwir eo din ;
ar skreved o weañ goustad, o kanañ goustad
a-hed biroù an avel ;
ar glouedenn houarn euc'h ar stêr ;
ar pont o terc'hel etre e vizied maen
e dro-c'houzoug perlez skedus ha sklas.

Skourroù ar gwez war ar glannoù,
o verkañ krenidik tres ar stêrioù,
a c'halv al loar war o skoazell
da c'houlenn o beajoù lemm
digant an oabl teñval,
met n'eus netra en oabl o respont.
Ne ra ar skourroù netra nemet reiñ ur son
da leviadoù avel.

Gant ho korf hag ho kerioù
hoc'h eus komzet evit pep tra,
laeret diganin ma estreded,
graet din bezañ unan
gant ar wrizienn hag ar skrev hag ar maen,
ha peogwir e kouskan ken tost ouzhoc'h
ne c'hellan ket o briata
na karout anezho e kuzh diouzhoc'h.

Aon hoc'h eus na teufen d'ho tilezel.
Ne zilezin ket ac'hanoc'h.
N'eus nemet an estrenien a ya da veajiñ.
Me, perc'henn war bep tra,
n'em eus lec'h ebet da vont.

(troidigezh gant Herle DENEZ)

Joan-Loïs RACOCROT

PEP TRA

Nevezinti ar menoz digenvez
plijadur ar c'hig lazhet

KARANTEZ AR MARV

kement-se a vez kinniget
en hevelep stêr
pa vez
ar frankiz
ouzh beg ar fuzuilh

(brezhoneg gant H. THOMAS)

Olier ar MOGN

KONTADENN AR WEZENN RUZ

N'eo ket un deiz evel ar re all, hiziv.
Emaon o chom e kêr, e kreiz-kêr, e-kichen ar
"Block III". Piv on ? E daoulagad trist an dud
emañ va buhez. N'it ket pelloc'h da gompren
piv on ha piv on bet.

Ya, hiziv, un deiz ispisial anezhañ ! C'hwi
a oar mat-tre, an hini a vousec'hoarhje d'an
dud pe memes a lavarje deoc'h : "Penaos emañ
ar bed ?" hep hoc'h anavezout, 'vel-se evit
ar blijadur, hennezh a vefe sparlet gant ar
re foll, sur. Pell 'zo dija emañ kont evel-
se. Betek-hen n'eus netra souezhus, eta. Ma,
emaomp ganti. Marteze, n'ouzit ket an dra-se
mes pell 'zo, ne oa ket ar saosneg yezh nemeti
an dud. Ne gredit ket ac'hanon ! Gwir eo, hen
touiñ a ran ! Ya, pell pell 'zo 'veljust, ur
pemp pe c'hwec'h kant vloaz bennak d'an nebeu-
tañ. Da skouer, amañ er c'harrez A 352 e oa
komzet ur yezh iskis. Gortozit... A ya ! ar
brezhoneg. Petra e oa ? Ma, ur yezh evel unan
all. Na bravoc'h, na displijusoc'h. Un tammig
bravoc'h evit ar saosneg a-vremañ koulskoude.
Bez e oa enni c'hoazh anvioù aet da get en hor
yezh. Anvioù bleunioù, livioù, anvioù broioù,
tudoù.

Pet annezad o komz ar yezh-se ? Ma, n'ouzon
ket ken, mes bugale oa oc'h ober ganti. Ya, ya
ur gwir goll-amzer...

Ne gomprenit ket perak on krog gant tout an traoù-se. Setu : ur paotrig en deus goulennet diganin ar pezh emañ o kontañ deoc'h, hag eñ, en deus bet fiziañs ennon. Neuze, diskouezet em eus dezhañ teñzorioù ankounac'haet. Nann ! N'eo ket foll ar paotrig ! Petra ? N'eo ket posubl komz d'ur wezenn ? Ha klasket ho peus dija ?

Bremañ e sell ar paotrig ouzh an dra varzhuz a zo en e daouarn : un hadenn ruz. Un hadenn a zo enni ar mousc'hoarzh kollet hag an dispac'h da zont.

Ne vo ket pell da vezañ fleurenn lies-liv c'hoarzhoù an dud. Ar gwir 'vez bepred gant ur wezenn-drev - pa fell dezhi kaozeal.

Yann GERAUZERN

DAEL AN ELESTRAN

Eus ul lestr uhel e gwerenn
Emañ o pignat ur fesken
Flammoù tomm livioù ar gwad
'Zlefe lemmat evit ar Mad.

Kaliroù voulouz mouk teñval,
Goafioù gwir o tañsal
Ur c'horoll spontus didruez,
Arouez ar vuanegezh.

Trec'h an natur ouzh ar sioù,
Digant paotred vad, daeloù,
Dispac'h ar bobloù mac'hornet,
Elestran ruz, bezit karet !

Youenn DREZEN

SKRAPADEG AVALOU TREOUGI

War an abardaez : emañ taolioù an anjelus o paouez kouezhañ diouzh tour an iliz. Ar maged a droidell goustad a-us d'an toennoù mein glas. Mare koan eo.

Paotredigoù ha krenn-baotred Rozig-ar-mager a zo azezet, evel kustum, war an tirienn dindan bochadig gwez evlec'h an Dourig-kozh en tu all d'ar foenneg.

Pep hini a zo gantañ, etre pennoù e zaoulin, ur mell skudellad soubenn ar rouz. C'hwec'h nav, unnek, trizek vloaz, berr ha hir, tev ha treut evel m'emañ, frioù mec'hi ar Rozig a zo tammoù gwazed bihan anezho. Toull eo alies o bragoù war o fenn a-dreñv, sec'hañ a reont atav o fri gant o mañch, met gwazed bihan int. N'o deus ket aon rak o skeud ha kalonek ez a o soubenn ganto war draoñ, oignon hag all.

Diskennet eo an heol, n'eus ket ur goabrenn en qabl ruz-roz : c'hwez vat, ne lavaran ket, e-giz c'hwez mel, ur frond flour d'ar fronell, hag a laka dour da zont e-barzh ar genou.

- Me 'ghev c'hwez avaloù.
- Me ivez. Diouzh Treougi e teu...
- Oi ! Me 'z afe ganin meur a hini warlerc'h ur banne soubenn vat evel houmañ.
- Na ganin 'ta ! Ha ma 'z afemp da Dreougi !

Tudoù kaezh ! Ne voe ket seizh daletoc'h

ar soubennoù o tiskenn. Tapet e voe ar paz gant daou pe dri ken bras o doa lakaet al loiadoù en o dremmoù. Prim ar skudilli d'ar gêr, prim ar sac'h diouzh an armel, pe ur mouchouer bras, pe ur pennad kordennig voan da dreiñ en-dro d'an dargreiz. N'eo ket evit mirout diouzh ar bragezioù da gouezhañ ; evit diwall an avaloù e-barzh ar grubuilhoù, ne lavaran ket.

... Ha prim ha prim emañ erru ar baotred adarre dindan evlec'henoù bras an Dourig kozh.

O anvioù ?... Blev gwenn, brasañ galouper noz ez anavezis morse, aet da vartolod abaoe ha bet e-pad bloavezhioù o kantren e broioù ar Chinoaed ; Morvan togn ; C'hwez-Vat ha Lili Tal-Brizoù, lez anvioù anat deoc'h ; ar Brenn, ur masakod, ur vouezh dezhañ e-giz d'un eostig, hogen laer e-giz ur c'hazh ; Per Lallac'h, merket doun e jod gant ur gleizenn, abaoe ma oa kouezhet en traoñ diouzh ur wezenn bin ; Al Lubi, Kefeleg, va c'henderv ha me ; ar Garz, paotr ar "vilioù" ; Bolzer, ar c'hakouz ; ar Fiouig, enebour ar re binvidik a viskoazh, nemet lezirek touet ; ha neuze an Dag, an Dag paotr e vrec'h fall, an Dag "brec'h-yod" evel ma lavaremp. Ur vandennad ac'hanomp, peadra da skarzhañ kement liorzhad avaloù a vleunie e bro venniget ar Vigoudenned.

Ar C'holomb kozh n'oa ket muioc'h a vall war e vartoloded da dizhout an inizi, eget warnomp da vont d'an arigrap da Dreougi. Gortoz a rejomp an deñvalijenn, e-pad ur ruziad amzer. Dizañjerusoc'h eo mont dezhi dindan askell an noz. Padal, loar gann e oa an noz-vezh-se. Sklaer ar maezioù evel e kreiz an deiz !

Mat evelato ! Hag ar baotred en hentoù, ur safar d'o heul, gouest da zivouzarañ ur c'hloc'h, penn-da-benn hent bras Pornaleg.

Lavaret em eus deoc'h n'o doa ket aon rak o skeud. Mont a reont e-biou da barkieier moredet e skleur al loar, da bennoù-tiez serret kloz, da zaou goad doun, ma ne gredent ket re sellout e-barzh, ken teñval e oant. Ha setu Treougi. Peoc'h raktal. Ar maner a zo ouzh e goadoù, ahont, evel ur voger du uhel, savet a-dreuz an hent. Sioul eo pep tra en dro dimp.

Ar grilh-douar, ar radenn sec'h, ar mouar du war an drez hag ar gwez pin a zo kousket dinec'h o c'houstiañs, evel m'eo kousket kement den onest, aet skuizh gant e labour pem-deziek. Hogen, ni n'omp ket skuizh hag onest ? ... Feiz ! Va Doue !... Sevel e viz an neb ne reas ket ar pec'hed !...

Prennet e veg gant pep hini ; trouz ebet war ar maez, nemet, a-wechoù du-hont, ur c'hi bennak o harzhal ouzh al loar.

Lammat a ra ar baotred dreist ur c'hleuz ; treuziñ a reont ur c'houblad parkeier, ha goude ur c'hoad gwez pin. E traoñ ar c'hoad ha gwaschedet gantañ, ur stivell hag ur feunteun gozh. Ur stivell, gant melloù mein karrezek tro-dro, ma teu ar merc'hed da bradañ o c'houez en deiz ; ur feunteun darempredet a viskoazh gant ar c'halouperien a oa ac'hanomp. Meur a wech hor boa kavet gras dont da derriñ hor sec'hed en he dour sklaer, p'edomp er skol louarn.

Al loar a lindre hec'hann, e-kreiz ar stivell, ker splann hag ur melezour.

En em vodañ 'reas ar baotred en-dro d'ar Morvan togn, ur skrifelleg hir war e zivesker, oajet a bemzek vloaz. Dibabet e oa bet da vestr ganimp, ha reiñ a rae e urzhioù evel ur gwir rener. Komz a rae war e bouez hag a vouezh izel, en ur dreiñ e benn a zehou hag a gleiz.

- Tri c'hant metr ac'helen emañ al liorz avaloù, paotred ! N'eo ket dav en em lakaat droch evit diskouez n'hon eus ket aon. Taolomp evezh eta paotred ! Gwall dud eo re ar maner. An hini a chomo da stlejañ a bako un tenn fuzul ker buan ha tra. Gant grouan holen ouzhpenn... Laerezh avaloù Treougi ? Kouls laerezh ul leue diouzhtu e kraoù va moereb Chann.

- Da voereb Chann n'he deus leue ebet.

Ne lavaran ket ivez, leue da unan ! Met paotred, ma n'oc'h eus ket c'hoant kaout dent ar chas e strad ho pragoù hag e kig ho feskennoù, evel just ; ma ne blij ket deoc'h ar skourjez war ho tiouскоаз ; ma ne fell ket deoc'h chom stag ouzh ur wezenn e-pad an noz, serrit ho kenoù, lakait voulouz en dro d'ho treid, hag hastit buan.

- Sell 'ta ! M'eus aon en deus hemañ aon ! Kerzh d'ar gêr neuze, Togn !

- Aon ! Ro peoc'h d'am penn. Me 'm eus skiant-prenañ, me, ma ne fogasan ket eveldout. Hag un ali mat a zo mat da gaout, dreist-holl evit ur genaoueg egizdout. C'hoant avaloù am eus kement ha te, ha c'hoant mont da gousket em gwele 'm eus ivez, hep tammoù holen pe skilfoù chas e-barzh va feskennoù... Hag evit se eo e lavarin dit serriñ da veg ha sentiñ ouzhin.

Me eo ar mestr ha me lavar eo poent bras stagañ ouzh al labour...

Ha kuit hon ebestel, astennet ganto o gouzoug, koutig-koutig, a-dreuz ar c'hoad pin, penn da benn ar c'hleuziadoù strouezh. Ul lamm a-dreuz hent bras Pornaleg, un hed kleuzioù adarre. Setu liorz h ar maner.

Ur c'harzh uhel tro-war-dro, gant radenn hir, ha spern ha strouezh ha torgosoù derv. Ha ni o tic'houzougañ dre ar riboulioù, diwar gorre ar c'hleuz, e-barzh al liorz. Difiñv an noz, moredet ar gwez avaloù. N'eus ket ur bouchad avel en oabl. Ar gwez, sklerijennet klok gant al loar, a zo stouet o skourroù betek an douar. Pet ez eus anezho ? Dek, ugent, tri-ugent, ouzhpenn kant, e renknadoù ingal. Kristenien geizh ! Nag a avaloù, nag a avaloù, skoachet flourik e-touez an delioù ! ... Keuz am eus da vezañ degaset ganin ur sac'h re vihan.

- Ac'hanta ! Mont a reomp ? a c'houlenn ar Blev-Gwenn, a-zindan ur vodenn lann.

- Ya, ya ! a daole ar Morvan togn. Te, Bolzer, kerzh da ober ged, du-hont, a-dreñv puñs ar vereuri. Ma klevet trouz, ur c'hwitelladenn ! Kompren a rimp. Ni en em denno pep hini diouzh e du, d'en em gaout en-dro d'ar stivell evit lodañ an avaloù. Komprenet eo paotred ?

Gleb gliz eo ar geot ; petra vern ? C'hoarzhzet ho pije gant lavagnoned Rozig-ar-Mager, o vont a-dreuz al liorz e-giz kizhier, war balvoù o daouarn ha war o fennoù daoulin. Daou du-mañ, tri du-ze, en em silañ 'reont e-barzh teñvalijenn du-pod ar gwez. Dizale e voe al liorz adarre evel ma ne vije ket bet un ene enni.

Aet e oa ar Gerc'heiz - me, mar kavit gwelloc'h - gant ar C'hefeleg, e genderv d'ur wezennad avaloù skildrenk, anavezet mat ganto. Kinnig a rae ar skourroù terriñ gant samm ar frouezh, melloù avaloù mirzhin ha melenek, tud paour ! azv, ur c'hwez vat d'o heul, peadra da lakaat dour deoc'h en ho kenou e-pad pevar bloaz. Kement e oa, ma ne ouien dre be du stagañ ganti. Sankañ 'ris va dent en unan, ha bec'h dezhi ! Ur sac'hig bihan divalav am boa degaset ganin avat ! Leun e voe kerkent. Hag amzer am eus ivez da gargañ va grubuilh ? Ur sell araok e-barzh al liorz : goulo eo atav e-giz ur vered. 'M eus aon e tarnij huandadoù zoken. Anaon ? Avel ? Ya-da ! C'hoarzhadegoù mouget, ne lavaran ket.

- Tarzhañ a ray paotred ar Rozig gant an avi ! " e voe klevet.

Skañvaat a rae ar skourroù. Laouen e oa hol lakepoded. Padal, evel un taol kurun e-kreiz bodadeg konikled ar waremm, e skiltr ur c'harm :

- Kas warnomp ! Hou ! hou ! hou...

Dispourbellet e zaoulagad, dilammet e oa ar gedour el liorz en ur hopal, hag e tifrete, hag e fuste, treuziñ a reas al liorz evel un tenn. E-giz ul loen sot. Strafuilh ! ha youc'h ! ha tec'h timat war du ar c'hoad pin. Bras ha bihan, tev ha treut, sachañ a rae pep hini e gilhoroù, ha dillo !

Amzer dastum va sac'hadig avaloù, ha me da sankañ tiz eeun davet ar c'harzh dostañ. Ne santis ket allazig an drein-spern, me respont deoc'h. Trouc'het e oa va anal.

Edo ar gward el liorz, ur penn-bazh spon-
tus en e zourn. Aiou ! kein unan bennak. Gant
ma ne vo ket va hini. Ha ne vo ket ! Diwar ar
c'hleuz, houp ul lamm... e-barzh an dour !
Gwasañ c'hoazh ! stagañ a rae al lec'hid, lemm
e oa an elestr. Boubouilhat a rae an dour-chag ;
ha me a oa karget va botoù ha glebiet va bra-
gou...

Emaoun er-maez avat. Un toull en avel, ha
me da redek, ha redek, ma ouien ober. A-benn
ez is er gwez pin hag ur maen bennak. Hogen
n'em bije ket redek buanoc'h ma vije bet an
tan em fenn a-dreñv.

Setu ar stivell. Den ebet ! Trouz ebet !
Sell ! Me 'zo ar c'hentañ. Eo ! Emañ erru ar
gedour. Sakre Bolzer ! A boan ma c'hell kaout
e anal, heñ ivez ! N'eo ket diskoelfet c'hoazh.

Diouzhtu war e lec'h e tegouezh ar Maoutig,
ur roued da vont d'ar marc'had gantañ war e
skoaz, ha goude ar Blev-Gwenn. Hemañ evit be-
zañ skañvoc'h, a oa bet stlapet e avaloù gan-
tañ war an hent. Kavout a reas an nerzh evela-
to, da folliñ :

- Cheulk ma 'z out ! Emezañ d'ar Bolzer.
Hag a oa dav dit hopal e-giz-se ? Diblaset eo
va c'halon...

Ar C'hefeleg, al Lubi, al Laer-Rouz, Morvan
togn a zired, an eil war-lerc'h egile, o c'hoar-
zhin glas an darnvuiañ anezho : pep hini avat,
o tiskargañ er bern, samm e avaloù, ur blija-
dur. Evit ober al lodoù, ne c'hortozer mui
nemet an Dag.

- Pelec'h eo chomet adarre an Hini Brec'h
Yod ? a c'houlennas ar mestr.

- Ar stoalleg-se a vo bet tapet gant an den,
eme ar Brenn, paotr an iliz.

- Tapet ? Houmañ a vefe unan neuze. Deuomp
da welout.

Ur gwiskad radenn da guzhat ar bern avaloù,
ha kuit ar baotred dre ar c'hoad teñval adarre,
da welout pelec'h e oa chomet an Dag.

Allas ! Deuet e oa ar wirionez gant ar
c'hurust. Ret anzav edo ar Brenn finoc'h eget
kaoc'h louarn. An hini finañ...

Paket e oa bet an Dag. Ha fest ar vazh en
e enor ! Tamolodet a-dreñv ar c'hleuniad strouezh
ni a wel, ni a glev.

Gward maner Treougi, imor ruz en e gof, a
heje e benn-bazh, ur pikol pennbazh, gant un
dourn ; gant an dourn all e sache war skouarn
an Dag, hag e voñse ar paotr paour :

- Ha ! Tres-kroug ! A ! Laer ha mab laer !
Me da bako me, koll-boued, fall tra, lor-
Frañs, penn-tach !... Dont da laezh va ava-
loù-me ? Evit da c'hopr. Un taol fuzul e-kreiz
da zaoulagad, mab an diaoul, un taol fuzul,
bremaik... Alo ! d'ar maner !...

Ar paour-kaezh Dag a oa gwisket liv ar ma-
rv war e zremm, nemet ur skouarn ruz-tan an
tamm anezhi... Ken sabadac'het avat, ken korilh
a oa e zres, ma taolas unan :

- Dag, na gac'h ket ez pragou, Dag !

Ma tirollas an holl gleuziad da c'hoarzhin
kreñv.

Sebezet krenn ar gward. Diskregiñ a ra diouzh

brec'h e brizoniad ; sailhañ 'ra davet ar c'hleuz ; sellout a ra. N'oa tro dro, na ki na kristen. Evel just. Rak difretet e oa kuit hol lamponed, ha buan, ha didrouz, dindan goudor du-dall ar gwez pin.

Kounnar bras er gward. Evel just ivez. Aes an dra da gomprenn. Diskenn a reas diwar e gleuz, o krozal :

- Paeañ a ray egile an holl... met... met !

Egile, evel just atav, n'oa ket chomet da c'hortoz. Amzer dastum pemp pe c'hwec'h aval war al leton, kement-se atav, tec'het e oa kuit an Dag.

Setu m'eo degouezhet e-tal ar feunteun, abenn ar fin, glas e veg, trouc'het e anal. Goap a reer outañ :

- Plijadur ac'h eus bet Dag ? Pelec'h out abaoe, Dag ?

- Va brec'h an hini eo.

- Redek a rez gant da vrec'h, te ?

- Nann ! Nemet krog e oa an den em brec'h. N'oa ket evit tec'hout !

Holl emamp bremañ gwitibunan, en dro d'ar bern avaloù, re zous anezho, re drenk pe skildrenk, re c'hwerv, azo ha glas mesk ha mesk, - an avaloù, n'eo ket ni !

Rannet eo ar bern, kement ha kement da bep hini. An Dag - o gounezet en doa - a voe roet dezhañ evit e lod, ar bravañ avaloù hag ar re wakañ.

Mont a reomp, goude-se da dapout an hent bras.

Ha dre ar gazell, e tistroomp da Bont-n'Abbad, en ur vale d'ar paz, evel soudarded, en ur youc'hal son avaloù Treougi.

Ez an d'e ganañ deoc'h.

- Ha krediñ a ra dit eo dav-dav ?

- Mat-tre ! Mat-tre !... Neuze, noz eo anezhi ; poent eo mont da gousket. Kenavo ur wech all.

(Embannet war SAV, niv. 9)

(Goañv 1938)

Yec'han Dominig OLIER

Da Rene Vautier

Tresadennoù o fiñval !
da wad a zo livioù
o treuziñ va sellad.
Sellad perc'hennet
gant meur a lagad :
lagad gwer
evit an dezerzh dindan ar glav,
lagad ruz
evel an dir
o redek dre stumm
daouarn ar micherour,
lagad aour evit mirout pep heol
e donder al lestr beuzet,
lagad arc'hant
evit bezañ steredennoù
ouzh da vizied,
ha lagad du
evit bezañ banniel.

Tresadennoù o fiñval !
Ha n'em eus ket a-walc'h a zaoulagadoù
evit degemerout
pep stourm, pep dispac'h !

Ha te !
Paotr o tougen
stummoù ar berrbad
e koun hor emsavadeg,
ijinet ac'h eus livioù nevez
dizanavezet gant ar galloud :
liv ur vanifestadeg

na eo bravoc'h
hor youc'hadennoù eget
pep simfonienn c'hoariet
er c'hoarivaou bourc'hiz.

Lakaet ac'h eus
ar sonerezh
da vezañ skeudennoù :
skeudennoù o fiñval,
skeudennoù o tañsal,
skeudennoù o kantreal
a-hed al labouradegoù,
a-hed an atantoù,
a-hed an nozioù
drouklazhet gant o livioù.
Al livioù krouet gant ar barzh
a sav bardelloù
gant paveziou-kamera.

(Roazhon, d'an 20 a viz Eost 74)

Yec'han Dominig OLIER

SKOL AR VUHEZ

N'ouzon ket sevel frazennoù
hir evel trenioù leun a loened,
pa vez santet ger dre ger anal ar c'hreion
ha dour-c'hwez al liv.
N'ouzon ket, n'on ket aet e skol al levrioù,
er skol e-lec'h e lakomp hor revr war ur bank
hag e c'hortozomp ar ouiziegezh
a gouezh war hor c'haieroù
diboan ha divuhez.
Nann, n'on ket aet da c'houlenn digant ar mestr
toull-skol
lazhañ va spered war aoter ar galloud.
Saotrer a fell din bezañ
a-enep ar beleg lik
hag al lid kanvaouüs
a gas e-barzh ar bez
ar frankiz hag ar preder.
Fellout a ra din deskiñ
pell diouzh ar prezegennoù.
Ne fell din kaout evel mestr
nemet ar vuhez.

Skol ar vuhez a grog gant an dilavar.
Desket e vez da gentañ selaou :
selaou ar glen o treiñ en-dro
freget gant ar ar ar c'houer
evel ar bugel en e wele
o treiñ hep dihuniñ.
Kan al laboused e donder ar c'hav
a gas dre an heol ene ar gwerzher kollet.

Al loa er skudell goullou
a ziston evel taboulin an ankou.
Selaou ar vuhez o skrijañ,
ar vuhez o krenañ,
ar vuhez a zo droug enni.

Desket e vez goude sellout.
An heol o sklerijennañ ar gambr er mintin
evel ar vag kentañ a zistro d'ar porzh
goude ar goañv pesketerezh,
dorn ar c'hasker-bara
a c'houlem ur bistolenn
evit lazhañ ar re ne fell ket dezho
reiñ ul liard dezhañ.
Ar c'hrennard o reiñ e bok kentañ d'ur plac'h
evel ar babig o tizoloñ e viz droad hag o
c'hoari gantañ.
Sellout un den o stourm evit e venozioù
hag o vervel e-unan e-touez an engroez.

P'hon eus desket an traoù-se
p'hon eus heuliet mat kentelioù skol ar vuhez,
n'eo ket deut c'hoazh ar mare da gomz.
Ret eo araok :
OBER !

Pep hini a raio hervez e venozioù,
hervez e varregezh.
Kelenner ebet evit lavarout pezh a zo mat pe
fall.

Ret eo da bep hini bezañ emzeskard.
Mestr ebet, deut eo ar mare da vezañ kiriek.
Ha dibab an hent mat pe an hent fall.
E-tal e goustiañs,
eo dieub an den da vezañ,
rak gellout a ra lavarout :

" Fellout a ra din "
ha dieub da gemer
an hent mat pe an hent fall.

Goude an Ober,
gellout a ra mab-den komz,
gellout a ra sevel prezegennoù
ha skrivañ meur a levr.
Met an aliesañ ne raio ket,
rak goude selaou,
goude arvestiñ,
ha dreist-holl goude ober,
komz n'eo mui netra nemet un trouz
evit ar re na ouzont ket.

An hini fur ne gomz ket.
Skediñ a ra.
Ha me dija, re em eus komzet.

(Roazhon, 20-03-1974)

James JOYCE

E V E L I N E

Azezet e oa ar plac'h a-dreñv he frenestr o sel-
lout ouzh an tarzh-noz oc'h aloubiñ ar straed vras.
Stouet he fenn war rideochoù ar prenestr, en he div-
fron c'hwez al lien-kreton poultrennet. Skuizh e oa.

Nebeut a dud a dremene er straed. Gwaz an ti pel-
lañ a yeas e-biou, war e hent d'ar gêr. Klevout a reas
trouz e baziou o tasseniñ war ar riblenn simant ha
goude-se war an aleziad ludu gros a-hed an tiez bri-
kennoù nevez. Ur prad a oa el lec'h-se gwechall ha
kustum e oant da c'hoari eno, bep endervezh, gant
bugale an amezeien. Un den eus Belfast a oa deut neu-
ze, prenet gantañ an douarenn ha krog da sevel tiez
warni - n'eo ket tiez graet gant brikkennoù ruz-
flamm ha toennoù lufr. Kustum oa bugale ar straed da
c'hoari er prad-se. Ar re Devine, ar re Waters, ar
re Dunn, Keogh bihan kamm, hi, he breudeur hag he
c'hoarezed, Ernest avat ne c'hoarie morse ganto : re
vras e oa deut da vezañ. Alies e teue he zad war o
lerc'h, gant e benn-bazh sporn-du, d'o skarzhañ kuit
eus ar bradenn ; met peurliesañ e chome Keogh bihan
d'ober ged hag e youc'he pa wele he zad o tont. Dre
vras oant bet eürus d'ar mare-se. He zad ne oa ket
ken drouk-se neuze ; hag ouzhpenn-se, bev oa c'hoazh
he mamm. Kement-se oa pell amzer zo : bremañ e oa
deut hi, hag he breudeur, hag he c'hoarezed, da ve-
zañ bras. He mamm oa marv. Tizzie Dunn oa marv ivez.
Hag ar re Waters oa aet en-dro da Vro-Saoz. Kemm 'vez
atav war an traoù. Bremañ oa hi a oa ivez o vont kuit,
o tilezel ar gêr.

Ar gêr ! Sellout a reas war he zro, ouzh an traoù
oa ken kustum outo, an traoù he doa diboultrennet ur

wech ar sizhun a-hed kement a vloavezhioù, hag hi oc'h en em c'houlenn eus peseurt lec'h er bed e c'helle kemend-all a boultrenn dont. Marteze ne welfe ket mui biken an holl draoù-se, n'he doa morse soñjet e c'hellfe bezañ rannet diouto. Ha koulskoude, a-hed an holl amzer-se, n'he doa morse kavet piv a oa ar beleg a oa e skeudenn o vont melenoc'h-melenañ war ar voger a-us d'an armonium torret, e-kichen taolenn alaouret ar promesaoù graet da Varc'harid Mari Alacouque, benniget ra vezo. Bez e oa bet er skol gant he zad. Bewech ma tiskoueze ar skeudenn d'ur gweladenn bennak e veze kustum he zad da lavarout, en un doare dibalamour a-walc'h :

- E Melbourne emañ bremañ.

Asantet he doa mont kuit, dilezel ar gêr. Ha fur e oa. Klask a reas gwelout mat an daou du eus ar gudenn. Er gêr d'an nebeutañ he doa bod ha boued ; bez he doa ivez ganti ar re he doa anavezet he buhez-pad. Evel just he doa da labourat kalet, koulz er gêr hag er stal. Petra vije lavaret diwar he fenn er stal pa vije gouezet e oa skarzhet kuit gant ur paotr. Marteze vije lavaret e oa ur penn-sot anezhi hag un embann a vije lakaet er gazetenn evit kaout un all da labourat en he flas. Miss Govan forzh penaos a vije laouen. A-viskoazh he doa kavet un dra bennak da damall dezhi, dreist-holl pa veze unan bennak o se-laou :

- Miss Hill, ha ne welit ket emañ an itronezed du-se o c'hortoz ?

- Me ho ped, Miss Hill, klaskit bezañ hegarat.

Kuitaat ar stal ne rafe ket dezhi leñvañ.

En he zi nevez, en ur vro pell dianav, ne vije ket an traoù evel-se. Hi vefe dimezet a-benn-neuze, hi, Eveline. Doujañs a ziskouefe an dud eviti. Ne vefe ket graet outi evel ma oa bet graet ouzh he mamm. Zoken bremañ, ha hi tremen naontek vloaz, he doa aon

da vezañ kannet gant he zad. Gouzout a ouie e oa evel-se he doa tapet he c'hleñved-kalon. Pa oa bugel, n'en doa morse skoet warni, evel m'en doa skoet war Harry hag Ernest, peogwir e oa ur plac'h ; met abaoe ur pennad e oa krog da c'hourdrouz ha da lavarout dezhi Petra 'rafe dezhi panevet en doa soñj eus he mamm baour. Ha n'he doa bremañ den ebet ken da wareziñ anezhi. Ernest a oa marv hag Harry, a laboure da li-vañ ha da glinkañ an ilizoù a veze hogos bepred un tu bennak war ar maez. Ouzhpenn-se, aet e oa skuizh-spontus gant an tabut a veze ingal bep sadorn da noz diwar-benn ar arc'hant. Arc'hant he sizhun a roe bep taol, hep derc'hel netra eviti - seizh shilling - hag Harry a gase atav pezh a c'helle met ar gudenn vras a oa kaout arc'hant digant he zad. Eñ lavare atav e trouzvie an arc'hant, e oa penn-brell, na oa ket o vont da reiñ dezhi da deurel dre ar prenestri an arc'hant en doa bet kemend-all a boan da c'hounit, hag ur bern traoù all c'hoazh, rak peurliesañ e veze mezv hag imoret-fall ar sadorn da noz. A-benn ar fin e roe dezhi ar moneiz hag e c'houlenne hageñ oa-hi e soñj mont ur mare bennak da brenañ boued evit ar sul. Neuze oa ret dezhi redek buan-ha-buan d'ober he marc'had, he doug-moneiz ler du dalc'het start en he dorn pa oa o klask ober hent a-dreuz d'an engroez, ha distreiñ diwezhat d'ar gêr gant he samm. Ret oa dezhi labourat start evit lakaat an traoù da vont er gêr, reiñ boued d'an daou vihan oa bet lezet en he c'harg ha kas anezho d'ar skol. Ul labour tenn - ur vuhez kalet - met bremañ ma oa o vont kuit ne gave ket dezhi e oa ur vuhez ken displijus-se.

Gant Frank e oa o vont d'ober anaoudegezh gant ur vuhez all. Madelezhus e oa Frank, seven, kalon vat. Gantañ e oa da vont kuit, diouzh an noz, gant ar vag, evit dimeziñ hag evit bevañ gantañ e Buenos-Ayres, e-lec'h m'en doa un ti prest eviti. Na sklaer he doa soñj eus ar wech kentañ m'he doa e welet. O lojañ e

oa er ru, en un ti e-lec'h e oa-hi kustum da vont. Un nebeut sizhunvezhioù hepken a oa, a seblante dezhi. Be' oa en e sav e-kichen ar glouedenn, e gasketenn taolet war a-dreñv e benn, e vlev o kouezhañ a-fuilh war e zremm gaer. Deut oant d'en em anavezout. Dont a rae bemnoz da c'hortoz anezhi dirak ar stal vras e-lec'h ma laboure, hag ez ambrouge anezhi betek ar gêr. Kaset en doa anezhi da welout The Bohemian Girl ha laouen-dreist en em sante-hi o vezañ azezet gantañ er c'hoariva, en ur renkad plasoù na oa ket kustum da vont. Eñ blije kalz dezhañ ar sonerezh ha barrek oa da ganañ un tammig. Gouzout a ouie an dud en em zarempredent ha pa veze kanet dirazi ar son diwar-benn ar plac'h a zo e karantez gant ur martolod, en em gave war un dro plijet ha diaezet. Poppens a rae diouti, dre fent. Da gentañ oa bet laouen-holl o kaout evel-se un den yaouank ha goude-se e oa deut da garout anezhañ. Kontañ a rae kofchennoù eus ar broioù pell. Kroget oa bet da labourat evel mevel-pont, evit ul lur sterling ar miz, en ur vag eus ar gompagnunezh Allen Line, a rae an hent war-du Kanada. Lavarout a rae dezhi anvioù ar bigi, hag al linennoù en doa labouret warno. Tremenet e oa dre strizh-mor Magellan ha kontañ 'reas dezhi istorioù diwar-benn ar Batagoned spontus. E Buenos-Ayres a-benn ar fin en doa kavet ur plas mat, a lavare, ha deut e oa d'ar vro evit e vakañsoù. Eveljust en doa he zad klevet petra oa o vont en-dro etrezo o-daou, ha difennet outi gwelout anezhañ ken.

- Gouzout a ran petra eo ar seurt martoloded, emezañ.

Un deiz oa bet reuz etre he zad ha Frank ha diwar-neuze oa bet ret dezhi gwelout he den yaouank dre guzh.

Teñvaloc'h e teue an noz da vezañ er vali. An daou lizher war he barlenn a zeuee da vezañ dispisoc'h ar

gwenn anezho. Unan eus al lizheroù oa evit Harry, egi-le oa evit he zad. Ernest an hini he doa karet ar muiañ, met karout a rae Harry ivez. He zad oa o vont war an aod, an dra-se he doa gwelet, ha keuz en defe dezhi. A-wechoù e c'helle bezañ jentil-kenañ. Oa ket keit-se, pa oa-hi bet kalñv, ha chomet en he gwele a-hed an deiz, en doa lennet dezhi un istor tasman-toù ha krazet bara eviti en oaled. Un deiz all, pa oa bev o mamm c'hoazh, e oant aet holl er-maez da zebriñ e-kreiz menezioù Howth. Soñj he doa eus he zad o wiskañ kabell he mamm evit ober d'ar vugale c'hoarzhin.

Ne oa ket kalz amzer dezhi da vont, met azezet e chome e-kichen ar prenestr, he fenn o pouezañ war rideoch ar prenestr, oc'h analat c'hwez poultrennek al lien-kreton. Pelloc'h er vali e klevas son un ograou-Barbari. Anavezout a rae an ton. Souezhus e vefe klevet ganti en noz-se, da zegas da soñj dezhi ar bromesa he doa graet d'he mamm, ar bromesa da chom er gêr d'ober war-dro an tiegezh keit ha ma c'hellfe. Soñj he doa eus nozvezhiad diwezhañ he mamm o vervel ; adarre en em gave-hi, evel neuze, er gambr serret ha teñval, en tu all d'an trepas, hag er-maez e kleve o sevel un ton melkonius eus Bro-Itali. Lavaret e oa bet d'an den e ograou mont da seniñ pelloc'h ha roet dezhañ c'hwec'h kweneg. Soñj he doa eus he zad o tont en-dro e kambr he mamm en ur lavarout :

- Italianed daonet ! Dont en hor bro bremañ !

Hag hi oc'h eñvoriñ, e teuas skeudenn druezus buhez he mamm da bouezañ war he c'hreiz. Ur vuhez leun a aberzioù pemdeziek oc'h echuiñ er follentez. Krenañ a rae pa gleve adarre en he skouarn mouezh he mamm o lavarout gant aheurtreth diskiant :

- Derevaun Seraun ! Derevaun Seraun !

En un taol spont e savas. Tec'hout ! Ret oa dezhi tec'hout. Frank a savetafe anezhi. Reiñ a rafe buhez dezhi, karantez ivez marteze. Met c'hoant bevañ he doa. Perak e vefe ret dezhi bezañ maleürus ? Ar gwir he doa da vezañ evurus. Kemer a rafe Frank anezhi en he divrec'h, stardañ anezhi en he divrec'h. Eñ a oufe saveteiñ anezhi.

°°

En he sav e oa e-kreiz an engroez o vont hag o tont e gar an North Wall. Derc'hel a rae-eñ he dorn ha gouzout a ouïe e oa o komz dezhi, o lavarout adarre hag adarre un dra bennak diwar-benn ar veaj. Leun a soudarded oa er gar, ganto seier-beaj gell. Dre an norioù digor-bras e spurmantas tolzennad du ar vag, er fes a-hed moger ar c'hae, he frenestri ront o skediñ. Ne responte ket. Santout a rae e oa morlivet ha yen he divjod, hag en ur pennad dispi, e pedas Doue da ziskouez dezhi pelec'h oa he hent, da ziskouez dezhi pelec'h oa he dever. Leuskel a reas ar vag ur c'hwitelladenn drist el later. N'he doa ken mont d'ober, ha warc'hoazh e vije war vor gant Frank, oc'h ober hent war-du Buenos-Ayres. Prenet oa bet ar bilhedoù. Hag-eñ e c'helle chom hep mont, bremañ, goude tout ar pezh en doa graet eviti ? Gant an di-c'hoanag e teuas dezhi c'hoant disteurel ha derc'hel a rae da fiñval he muzelloù en ur bedenn don ha mut.

Seniñ a reas ur c'hloc'h, o sonnañ dezhi he c'halon. Santout a reas e zorn o pegañ enni.

- Deus !

Holl vorioù ar bed a zirollas war he c'halon. Bez e oa-eñ o sachañ anezhi da greiz an tonnoù, bez' e oa o vont da deurel anezhi en dour. Pegin a reas gant he daou dorn er glouedenn houarn.

- Deus !

Nann ! Nann ! Nann ! Ne c'helle ket. Evel unan foll e pege er gloued. Youc'hal a reas evel unan o vont da veuziñ.

- Eveline ! Evvy !

En ur pennad-tizh e redas en tu all d'ar gloued ha gervel anezhi da vont d'e heul. Youc'het e voe dezhañ derc'hel da vont war-raok met ne baoueze ket da c'hervel anezhi. Diskouez a reas hi dezhañ un dremm morlivet, dinerzh, evel fas ul loen kollet. En he daoulagad ne welas na karantez na kenavo : n'e anavezent ket mui.

(Brezhoneg gant Herle DENEZ)

Joan-Loïs RACOCROT

TAOLIT KUIT PEP TRA

Taolomp kuit pep tra
an deiz hag an noz
ar boan
pep tra
kaoc'h an oabl
o tañsal dindan al luc'hed
d'ar mare ma varv an douar
e-lec'h ma lesk tan ar goanag.

N'ankounac'haomp ket ar stivell
Reiñ a ra an neudenn dour
a salv.
Ha neuze, breudeur,
e vo ret-mat
teurel kuit an enebour
e-kreiz trouz ar c'hurunoù.

(brezhoneg gant Herve THOMAS)

Josette ar MEUR

MARC 'HAD LANNUON

- Oh ! Ma Doue benniget, deus pelec'h out o tont,
Maïvon, gant da vlev tout difurlu ?

- Met, plac'h kaezh, peus ket gwelet war ar ga-
zetenn on bet skubet gant an avel-dro an deiz-all ?
Graet m'eus div pe der gwech tro an douar. Memeus on
bet tapet evit ur bladenn-nij. Diskennet on da TRAOU
an DOUR hep parachut... hag hep koef ebet. Konten-
tet out bremañ, beg kirius. Ma, lak an tan dindan ar
pod-kafe buan 'ta, peogwir me zo arru trelatet gant
ar c'hozh touristed-se.

- Ma, ma Doue ivez 'ta. Te zodez t'eus c'hoazh
traoù fentus da laret. Met aer peus da gaout da vou-
zellen a dreuz ?

- Feiz ya. Palec'h mije ket. N'omp ket er gêr
ken bremañ. N'eus ket tu 'bet da vale war ar straed,
hep bezañ sac'het ha boutet gant ar barizianed. Mesk
'zo war blasenn ar Marc'hallac'h, n'eus ket met tud
didalvez, gant bragoù-berr, ha kaje netra war ar penn
a-dreñv. Ma Jezuz, sell amañ un echantillon ! Ha
n'int ket preset c'hoazh ! Aze o troidellat war-dro
ar c'hasedoù, evel kelien, gant ur c'hodak. Ah !
tennet a ve portrejoù, dampred a vo. A-dreuz hag a-
hed. Mat, ha setu ur vandennad karailhez a zeu da
sevel o frioù mec'hi war ma zro. An tad, ar vamm, ur
paotr kozh, ur vamm gozh ha pemp pe c'hwec'h marmouz
savet fall !

- O itron, c'hwi zo deus ar vro, a lavar din ar
plac'h hag ur c'hoef folklorik a zo ganeoc'h. Pegen
brav eo ! Na vefe ket moien deoc'h gwerzhiñ anezhañ,

evel "souvenir" ! Sell, mil lur, mat eo deoc'h ?

- Ho pa la ! Me m'eus ezhomm deus ma c'hoef. Ha se a dalv kalz arc'hant, tudoù ! Ha na ve ket gwelet kalz ken. Me m'eus eritet hennezh digant ma mamm-gozh.

- Ma, pemp mil lur hag ankoueet e vo an dra.

- Para pije graet d'am flas, Henriette. Ma po-kaezh kouef oa arruet uzet ! Soñj ket din m'eus graet marc'had fall.

- Me a zo a du da werzhañ deoc'h ma c'hoef, met neuze ret vo deoc'h prenañ diganin ur pemoc'h bihan.

Me am boa barzh ma c'hased ur ragodenn bihan a mi-je bet poan bazardiñ nezhañ.

Ar fri lous a oa evurus.

- O ya, tadig, pren ur pemoc'h bihan 'ta ! Laket e vo barzh ur c'hased war ar balkon. Ha roet e vo dezhañ ar restajoù deus ar pred.

- N'eo ket drouk ? a c'houlenn an tad.

- N'eo ket lous ? a c'houlenn ar vamm.

- O c'hwi a lavar traoù memestra. Hennezh a zo ar muiañ digourdi deus anezho tout. Ha speredek da vat.

- Peseurt anv en deus ?

- Fri togn.

- Anv fentus, a lavar un deus ar mormouzed.

- E TRAON an DOUR, al loened na gomprenont nemet ar brezhoneg. Da gentañ po nemet gaoulet anezhañ, just gant un "doc'h doc'h". Ha goude, ma peus c'hoant a larit dezhañ traoù dous e galleg.

- Daoust hag eñ o peus pourmenet nezhañ dija gant ur chadenn ?

Amañ memestra, Henriette, manket m'eus sac'hañ ; m'boa ket soñjet en se.

- A ! Nann vat ! Hemañ na plij ket dezhañ bezañ staget. Met, ma ya re vuan, sach dezhañ war e lost.

Pell on bet o werzhañ ma forc'hell gant ar gena-ouien-se. Peogwir eo bet ret din displegañ da ped eur e dape e lein, e adlein, na heulie rejim 'bet, a de-bre eus tout, forzh petra.

Pemzek mil lur m'eus bet evitañ memestra. Tennet o deus ur poltred. Me gant ar pemoc'h bihan ha gwreg an tourist gant ma c'hoef war he c'hokenn.

Ne ket evit laret : plijus e oant memestra. Losket o deus ganin o chomlec'h : un H L M gant seitek estaj. Int, emaint en unekvet estaj. Fi dam bie, ar porc'hell bihan, eñ a welo traoù. Prometet o deus din ur gartenn deiz kentañ ar bloz, gant foto fri togn. Sur a-walc'h devo soursi gantañ. Me sanset ne welan ket ur pemoc'h 100 kilo barzh un F 4. Surtout n'eo ket minellet.

Erfin, dalc'h 'ran da glakenniñ. Ha tout pezh a gontan deoc'h a zo fardajoù. N'eo ket evel ar c'hosmonoted a zo o karzhel war-du al loar. Int memestra ! Deus ket kleñved ar gêr. Me, pa 'z an deus c'hoste all ar Menez-Bre on kollet. Ma, gant na n'em gollint ket da zistreiñ. Da nebeutañ ma deus tapet echantilho- noù douar. Hag, ma o deus c'hoant da lakat patatez da ziwanañ du-hont ret vo dezhe lakat kalz a ludu. Patatez deus Vro Spagn a ra tra-walc'h a gevezerezh dija. Ma vez ret goude stourm a-enep marc'hadourezh al loar, penaos 'vo graet ? Surtout gant priz ar veaj, ken ker ! ! !

Sergi BEC

K A L O N E R - M A E Z

Ar bleunioù n'int ket evit sec'hañ el levrioù
Ar bleunioù a zo evit evañ
Hag evit debriñ.
Ha me bemdeiz me
A ev hag a zebr bleunioù ar mong
A gresk em empenn enebour.
Lakaet e vezan d'ober tout ar pezh 'zo mat
Evit koll ar c'hoant bevañ
Ha koulskoude...
E fell din mont er memes tu gant ar brasañ levez.
Reiñ a ran dit tout ar bleunioù a chom
Tout ar bleunioù a vount
E-maez va empenn enebour.

Met pelec'h out va melionenn ha va c'hig
C'hwez va nevez-amzer
Pelec'h out va c'hened ha va mor ?
Kanañ ha gouelañ a ran war un dro
O va c'harantez dieub ac'hanon diouzh an nann-vuhez
Ro din birvidigezh.

Va gwreg out. Va gwreg evit lavarout ya
Pe neuze nann. Va gwreg out evit ober trouz din
Pe evit bezañ pardonet. Va gwreg.

Me az kar ken on sot
Ha me az kar ken on fur
Kalon er-maez evel un teod
N e vezan mui biskoazh kerseet

Er mor n'eus nemet ar pesked,

En oabl n'eus nemet an evned,
War an douar n'eus nemet al loened
N'eus mui netra nemet an
nevez-hañv e penn kentañ
an amzer.

(troidigezh Mikael BURLOT)

AN TOUSEGI

Goude an arnev, an tousegi
a gan en arselin,
a gan, pa vez o noziñ,
ar c'han a blij din.

E glebor ar geotoù,
o c'han zo hiraezhus,
e sioulded an nozioù,
an nozioù kenedus.

An tousegi, war lez an hent,
a gan o hiraezh,
hag huñvreoù dianavez,
en noz, en nozioù sklent.

E deltoni al leton,
e kan a n tousegi ;
e kanont, pa vez o noziñ,
'vel ma kan va c'halon.

Jakez RIOU

SUSINIO

Da glemm, o mut, em gwele tomm,
â Lorc'hus, e braouac'h an noz
du-dall, ahont, e-tal an donn,
em izili a sil ahun
da estrenvan...

Ramzel, â Zismantrou ! Dibrestr, ha disto
Susinio, Susinio, dihentet war da c'heun,
keid-all, er riv du-dall, allas ! ha fall,
piv nemedon, â Zilezet, a soñj ennout,
allas ! henozh ?

C'hwirinet ar C'hivioul, e penn e virc'hed goañv !
N'eo ket o zalabav a c'holoio em c'houn
da hirvoud doun ;
na dour a-builh Bugul yud ar c'houmoul
hag e anoued.

Tommheoligoù 'vo c'hoazh war da durunell, ya !
Pa suto ar vilfid er c'hili glas, pa hinono.
Ha te, skinus, â Susinio, d'an heol e tasorc'hi.

Youenn DREZEN

Lennegezh Vrezhonek ha Lennegezh Vreizhek

(pe Hent Pras hag Hent Bac'h)

Gwerso ez eus daou rumm skrivagnerien e Breizh : da gentañ ar re a sav o skridoù e galleg, d'an eil ar re a sav o skridoù e brezhoneg.

Lod eus skrivagnerien ar rumm kentañ a ra anv eus Breizh hag eus ar Vrezhonek en o skridoù, lod all ne reont ket. Darn eus skrivagnerien an eil rumm a ra meneg eus Breizh hag eus ar Vrezhonek en o skridoù, darn all ne reont ket.

Ur skrivagner brezhonek a vez graet eus an hini a sav e skridoù e brezhoneg ha ne vern ma ne gever enno meneg ebet eus Breizh hag eus ar Vrezhonek. Skriviñ e brezhoneg, setu ar perzh nemetañ a ra ur skrivagner brezhonek dioutañ.

Ha pezh anv a vo lakaet d'ar skrivagner all, galleg gantañ ? Da dud 'zo ez eo trawalc'h gouzout ez eus ur Brezhon a ouenn (ginidik eus Breizh, mar kirit) eus ar skrivagner-se a-benn ober ur skrivagner breizhek anezhañ. Neuze, n'eus forzh mag eo neptu ha nepliv dañvez e skridoù. Pag e lavaran neptu ha nepliv diwar-benn ur skrivagner bennak ginidik eus Breizh, e venman lavaret, kenkoulz all, ne embann ket e vroadelezh hag e ra ur Gall anezhañ e-unan, na mui na maez. (E gwirionez, ar skrivagnerien neptu ha nepliv n'eus ket anezho, aes eo gouzout... Amañ e tal ar gerioù-se kement ha "hevelekaet", "galekaet"). Ur skrivagner gall eo, eus ar "Vreutagn", anezhi ur broviñs eus ar Frañs, ha mat pell 'zo !

Da dud all n'eo ket trawalc'h gouzout diouzh piv

e c'haolias ar skrivagner mañ skrivagner (eleze gouzout hag eñ a zo bet ganet e Breizh, pe gouzout hag eñ a zo brezhon, mar bez gwell ganeoc'h, rak Breizhad a dal kentoc'h kement ha den e chom e Breizh, war va menno) a-benn ober ur skrivagner breizhek dioutañ.

Eus an hini a embann e vroadelezh en e skridoù hag a ra ur Brezhon anezhañ e-unan e vo graet ur skrivagner breizhek enta.

Aze 'mañ an dalc'h, dres : ar peurliesañ, ur c'halz eus ar skrivagnerien anvet "breizhek" a ra anv eus Breizh hag eus ar Vrezhonek e giz-mañ : kel a vez ganto eus ar "Vreutagn", anezhi ur rannvro c'hall rebar d'an Douren, ar Bikardi ha me oar me... Tenniñ a reont dañvez o skridoù eus perzhioù zo a c'heller merzout er "Vreutagn" gant an dud, da skouer gizioù, kreañsoù hag all, da laret eo e livont, e taolennont (diouzh o gwellañ, gwezhavez...) ar vro hag an dud e chom enni evel pa ve ar vro-se ur broviñs bennaket eus ar Frañs hag an dud-se Frañsien eus ur rannvro bennak. A-vetoù ar skrivagnerien-se e kever tud a bep lec'h, hiniennoù eus Breizh ivez. Hogen n'eo ket ranket d'an nen bezañ ginidik eus Breizh evit sevel skridoù war he divout, razas ! Rak-se ne vo ket komzet eus lennegezh breizhek diwar-benn ar skrivagnerien-se. Komzet e vo spisoc'h eus ul lennegezh c'hallek rannvroel, eleze ul lennegezh savet e galleg gant skrivagnerien eus ur rannvro c'hall.

Ar skrivagnerien breizhek rik n'eus ket nemeur anezho... Penaos e tremen ar re-se da skrivagnerien breizhek ? Skrivagner breizhek a vo graet eus an hini a embann e vroadelezh, fraezh ha krenn, nes tortal hep termal, e-giz ma laaren tuchantik. Ha pag e vez kel gantañ eus Breizh hag eus ar Vrezhonek, n'eo ket e doare ar re-all, tamm ebet. Zoken mag e tennont ivez dañvez o skridoù eus perzhioù o bro hag he broiz e reont eus Breizh ur vroad, dezhi gwirioù hag all

ha n'eo ket ul lennegezh c'hallek rannvroel a falvez ganto sevel, met ul lennegezh vreizhek rik, eleze ul lennegezh vroadel e galleg, el lennegezh stourm e Breizh, e galleg enta. Gant ar galleg e reont, ya ! War e lavaront ne reont ket mad eus perzhioù dibar ar broviñs livus, ar vretoniri, na petra. Ha gwir bater eo, diouzh a lenner e skridoù lod-kaer anezho. Ar skrivagnerien-se a ra gant ar galleg, dre ret, ha dre heg hervez l'iniennoù anezho, dam in dizesk-kaer war ar brezhoneg, peogwir int bet savet e galleg, si-wazh dezho. War o meno n'eo ket dav dezho cheñch penn d'ar vazh er c'heñver-se. Koulz eo ganto tremen hep ar brezhoneg. D'o soñj n'eo ket pouezus-bras ar gudenn-se... Forc'hellek un netraig e hañvalo bezañ an disrann a lakaan war wel, marteze. Gwir eo n'eo ket gwall splann an diforc'h a c'heller da verzout etre lennegezh c'hallek rannvroel. Hag ouzhpenn e ranker lavaret e vez un dislavar bras gant ar skrivagnerien vreizhek, atav hag atav : ober a reont Brezhoned anezho o-unan. Diwar betra 'vat e c'hellont embann kement-se ? Petra c'hell o diferc'hiñ krenn diouzh ar C'hallaoued. Yezh ar Frañsizien a zeu ganto, o yezh eo, da vat. Evit gwir ne chom tra estreget ar yezh ; petiaoul a lakafe diforc'h etre ar C'hallaoued hag ar Vrezhoned, hiziv an deiz, a-du-rall ? Hengustumou ar broioù a ya da get, tamm-ha-tamm, buanoc'h-buan evit komz heñvel ouzh ar wirionez. Ha n'eo ket war-nezho e c'heller diazezañ an dibar a ve gant ar vroad-mañ vroad. Displeget eo kement-mañ pelloc'h. Ar yezh, setu ar sichenn nemeti bremañ. War an divout-se eo dav lavaret n'emañ ket ar skrivagner breizhek ganti, na tostik da vezañ, kia ! Un den brizh n'eo ken, a gav din. N'emañ ket war an tu mat. Un dilenn a zo d'ober pe giz all e van an dislavar ha n'eus dibenn ebet dezhañ. Ar skrivagner gallek rannvroel n'eo ket un hiron anezhañ. War e du emañ-eñ. D'e soñj, an dibab a ve d'ober n'eus ket anezhañ, trapenn e kred dezhañ ez eus ur Gall dioutañ. Diwar-

se eo da dezhañ ober gant ar galleg. Ne sav kudenn ebet gantañ. Ar skrivagner breizhek, eñ, a rank mous-trañ war e zislavar... Diwar-bouez ar skrivagnerien vrezhonek e tleer merkiñ meur a dra ivez : pell bras 'zo ez eus en o mesk daou rumm : ar re a zo o skridoù diouzh skouer ar skrivagnerien c'hall, ken e keñver an dañvez, ken e keñver ar stumm, hag ar re a zo o skridoù diouto o-unan, eleze distag-krenn diouzh nep patrom gall (ha gallek, eveljust). E grez ar c'hrenn-vrezhoneg ez eus bet savet ul lennegezh, evit un darn hepken, diouzh pimpatrom ar prantad e Bro-C'hall, ha dre vras diouzh skouer ar mare en Europa, dre berzh ar sevenadurezh kristen, anat d'an holl. An dañvez anezhi a zo deut da Vreizh eus ar Frañs gant ar galleg pe al latin : ne oa ken met drevezal dañvez ar skridoù gallek, pe latin c'hoazh. Lod-kaer eus ar skridoù krennvrezhonek deut betek ennomp a denn an dañvez anezho d'ar pezh a veze graet d'ar mare-se e Bro-C'hall pergen, met ivez e kement bro gristen eus Europa ar Gornog. Diwezhatoc'h e voe graet kemend-all, mui pe vui. Drevezal ha taneval hon amezeien a zo bet graet, a-gozh. Skridoù diles, dibar, a zo bet savet ivez, n'eus man ebet. Al levrioù a zevosion a ya d'ober darn gaer hol lennegezh kozh, a embann tud 'zo. Gwirik a-walc'h, ur mare 'zo bet. Lavaret n'eus bet ken met ar seurt "lizheradur" a ve diwir avat.

Gwezhall enta, e veze savet aliesik skridoù brezhonek a-ziwar skridoù gallek kempred dezho, ha n'eus ket gwall-belloù e veze graet heñvel c'hoazh. Bremañ n'emañ mui ar c'hiz gant ar skrivagnerien vrezhonek ober evel-se, war-bouez un nebeudig... Ne lavarint ket ez eo bet fall bep tro ober diouzh skouer skrivagnerien c'hallek 'zo ; a-wezhioù ez eo bet apletus, siken. Dres evel er mareoù-mañ e weler skrivagnerien vrezhonek e vont da gaout un tañva eus lennegezhioù ar bed-holl. Arabat e ve ober rebechoù dezho dre ben da se. Dav eo gouzout evelkent ez eus bet savet un toulladig

mat a skridoù brezhonek a-ziwar skridoù gallek diste-rik a-walc'h pe liv ar c'hozh warnezho. En naontekvet kantved hag e penn kentañ ar c'hantved-mañ, da skouer, evedo ar c'hiz gant ur puilhad skrivagnerien vrezhonek sevel troidigezhioù diwar fablennoù Yann ar Feunteun hag all. Yannigoù diwar-lerc'h ne oant ken... War zieriañ ez a rañs ar skrivagnerien vrezhonek seurt-se, ha tremen poent eo ! Ne dal ket ar boan komz pelloc'h eus distervez o skridoù...

Arabat eta ober stad eus kement skrivagner brezhonek a zo bet ; pag emedon o komz eus ar skrivagnerien brezhonek e lavaren e oa e-touez ar skrivagnerien c'hallek rannvroel kalzig tud a embanne levrioù a-zivout boazamantioù, kustumoù Breizh hag all. Just a-walc'h, skrivagnerien vrezhonek 'zo o deus graet kemented-all c'hoazh, ha n'o deus graet tra ken met se, lies-a-wezh. Didalvoud n'eo ket, sur-mat. Ouzh-penn-se mag o deus embannet kement-se e brezhoneg e oa e-sell da lakaat ar Vrezhoneg d'ober o mad eus ar pezh a veze skrivet diwar o fenn. Razas a ve tu da damall d'ar skrivagnerien-se bezañ chomet hep deskadurezh gwirion d'o lennerien...

Nevez-flamm-flimmin eo, ret-mat hen lavaret, al lennegezh vrezhonek rik, eleze al lennegezh vrezhonek dezhi un dalvoudegezh hollek par da lennegezhioù dreistañ ar bed a-bezh. Al lennegezh-se a zo enni meneg eus Breizh, eus ar Vrezhoneg, nemetken.

An dud a vez kel anezho el lennegezh-se n'int ket Brezhoned anezho. Tud ez int da gentañ-penn, bediz, mar bez gwell ganeoc'h. Evel-hen n'emañ ket mui al lennegezh vrezhonek war enk.

Ganedigezh al lennegezh-se a zo deut war an diwezhañ, e-ser toc'horidigezh ar brezhoneg, gwashañ pezh a zo !

Piv an diaoul a gredo reiñ skor d'al lennegezh

vreizhek goude-henn ? Amster eo al lennegezh vreizhek a zo he lod dibunañ an hevelep aridennad santoc'hadou da viken, m'eus aon. Piltrotat a ra hi ha tonket eo dezhi chom sac'het dez pe zeiz, rak ne deu ket ne-meur a nevezentez ganti, dezhi da embann ratozhioù felenn... Al lennegezh vrezhonek a zo he fal boueta spered ar Vretoned, en o yezh, na petra, ha n'eo ket evit fardañ an hevelep keusteuern, betek re, anez ez afe an dud skuizh-marv ganti, naez o defe o gwalc'h ken tizh ha tra. Setu e rank mont war-raok bepred. Troiñ ingal, setu planedenn al lennegezh vrezhonek, mod all emañ graet ganti.

Graeme ALLWRIGHT

DIVENT EO AR MOR

Divent eo ar mor, n'hallan ket treuzañ
'm eus ket eskell 'vit nijal dreistañ
Kempennit din ur vag evit daou
roeñvat rafomp ma dous ha me

Gwelet a ran ul lestr o tont
barr gantañ e vourzh a draoù
n'ouzon ket ha kaset 'vin d'an traoñ
gant ar garantez zo ennon

Ouzh 'n dervenn yaouank am eus harpet
o soñjal e c'hallje chom somn
hogen, siwazh, he deus pleget
torriñ 'deus graet 'vel ma c'harantez

'n ur bod glas 'm eus laket ma dorn
'krediñ kavout bleunienn ennañ
met gloazet 'm eus bet ma bizied :
ar vleunienn dener zo kouezhet.

Karantez ken kaer ha ken lirzhin
hag ur rozenn diouzh ar mintin
tremen a rit 'vat, karantez,
'vel ar bleunioù gant an here.

(troidigezh gant Mikael BRIANT)

Liam O'FLAHERTY

AR SNIPER (°)

Peuznoz gorrek Mezheven a droe da noz. Paka-
dennet e chome Dulenn en deñvalijenn, ha ne
oa nemet sklaerder morlivet al loar o teurel,
a-dreuz d'ar c'houmoul eonennek, ur sklerijenn
disliv war ar straedoù gounezet gant ar serr-
noz ha war doureier du al Liffey. En-dro d'ar
Four Courts, gronnet ha sezizet, e stlake trouz
ar fuzuilhoù. Amañ hag ahont, a-dreuz kêr, e
tiroge mindrailherezoù ha fuzuilhoù sioulder
an noz, a dammoù, evel chas o harzhal ouzh tiez-
feurm kollet war ar maezioù. Republikaned ha
soudarded ar Stad Dieub a gase da vat ar bre-
zel diabarzh.

E laez an doenn, tost ouzh O'Connell Bridge,
e oa gourvezet ur sniper republikan, war e api,
e fuzuilh en e gichen, ur rumm lunedoù pellwell
a-ispilh en e gerc'henn. Dremm ur studier oa
dezhañ, lemm hag embleustret, met en e zaoula-
gad e oa lugern skornet unan trelatet gant e
feiz. Don ha prederiet, daoulagad un den kus-
tum da welout ar marv.

(°) "Sniper" a vez lavaret, e saosneg, diwar-
benn ur soudard a stourm distag diouzh ar re
all. Galleg : franc-tireur.

Bez e oa o tebriñ ur sandwich, doare dezhañ bezañ marnaoniet. Hep tamm e oa abaoe ar mintin. Re enervet e oa bet evit kemer amzer da zebrif. Echuiñ a reas e sandwich, tennañ ur voutailhig whisky eus e chakod, hag evañ ur banne. Lakaat a reas ar voutailh en-dro en he flas. Etre daou benn skiant e chomas ur pennadig, o 'n em c'houlenn hag-eñ e c'helle kemer ar riskl da enaouiñ ur sigaretenn. Arvarus e oa. En defivalijenn e c'hellfe ar goulou bezañ gwelet, hag enebourien a oa o sellout. Ober a reas e soñj. Silañ a reas ur sigaretenn etre e vuzelou, strakañ un alumetezenn, hag en un alanad e lonkas ar moged, o lazhañ an alumetezenn. Tost raktal e flastre ur bolod war splad an doenn. Tennañ 'reas un alanad all diouzh e sigaretenn, hag he lazhañ. O sakreal a vouezh izel en em lakaas da ruzañ pelloc'h war an tu kleiz.

Gant evezh bras e savas e benn dreist ar splad evit teurel ur sell. Ul luc'hedenn all, hag ur bolod all a c'hwistellas a-us d'e benn. Splujañ 'reas raktal. Gwelet en doa al luc'hedenn en tu all d'ar straed.

Rollañ reas betek ur siminal a oa a-dreñv dezhañ hag, harp enni, e savas e gorf en doare ma teufe e sell a-live gant splad an doenn. Ne oa netra da welout nemet toenn an tu all o troc'hañ an oabl glas-teñval. Kuzhet e chome e enebour.

D'ar mare-se e treuzas ur c'harb-brezel ar pont, o tont goustadik-tre war-du ar straed. Chom a reas a-sav, en tu all, un hanter-kant metrad bennak diouzh an ti. Bez e c'helle ar sniper klevout ar c'heflusker o tialanañ.

Buanoc'h e lammas e galon. Ur c'harr Free-State e oa. C'hoant bras en doa da ober gant e fuzuilh, met gout a rae na servije da netra. Morse ne vefe houarn ar spontailh griz-se toullet gant ur bolod.

Diouzh ur straedig a-gostez e tiskornas ur vaouez kozh, war he fenn ur skerb pilhaouet. Stagañ reas da gomz d'an den e tourig ar c'harr, he biz o tiskouez al lec'h ma oa-eñ o kuzhat. Flatrerez.

Digeriñ a reas an tourig, war wel e teuas penn ha divskoaz un dan, troet anezhañ war-du ar sniper. Sevel a reas hemañ e fuzuilh, ha tennañ. Kouezhañ a reas ar penn war houarn an tourig. Kregiñ a reas kerkent ar vaouez kozh da redek war-du ar straedig. Ur wech all e tenas ar sniper. Treiñ a reas ar vaouez warni hec'h-unan a-raok kouezhañ en ur skrijañ.

Diwar an doenn dirak e stlakas un tenn all, hag e lezas ar sniper e fuzuilh da gouezhañ en ur sakreal. Tregerniñ a reas an arm war an doenn. Peadra da zihuniñ ar re varv, a soñjas. Ne glaskas ket kemer e fuzuilh en-dro. Ne oa ket evit sevel anezhañ. Evel marv oa e vrec'h. "Va Doue", emezañ, gloazet on".

En e astenn war an doenn e ruzas betek ar splad gant e zorn kleiz e tastonas e vrec'h dehou, gloazet. Diveriñ a rae ar gwad a-dreuz milgin e chupenn. N'en doa ket poan. Just ur santadur a varv, evel pa vije bet troc'het e vrec'h outañ.

Buan e tennas ur gontell diouzh e c'hodell : kemer a reas harp ouzh ar splad evit digeriñ anezhi. Troc'hañ reas ar vilgin da vat. Bez e

oa un toull bihan e-lec'h ma oa aet tre ar bolod. Eus an tu all ne oa toull ebet. Chomet oa ar bolod en askorn, torret an askorn gantañ emichañs. Klask a reas plegañ e vrec'h izeloc'h eget ar gouli. Plegañ a rae. Ar boan a reas dezhañ stardañ e zent.

Neuze, en e c'hourvez a-dreñv ar vogerig, kloz e zaoulagad, e klaskas nerzh e youl evit trec'hiñ war ar boan.

Er straed, izeloc'h, e oa sioul pep tra. Skarzhet e oa kuit ar c'harr en tu all d'ar pont, gant penn ar c'hanolier o hejañ war an tourig. Korf ar vaouez a oa atav er san.

Pell amzer e chomas ar sniper da fichañ e vrec'h, o prederiañ war an doare gwellañ da vont kuit. Arabat e oa d'ar mintin kavout anezhañ war e zoenn, hag diwar an doenn all e vire an enebour outañ da skarzhañ kuit. Ret oa dezhañ lazhañ an enebour-se, ha ne oa ket evit ober gant e fuzuilh. N'en doa nemet ur revolver evit hen ober. Neuze e teuas ur menoz en e spered.

O tennañ e gasketenn, e lakaas anezhi e beg e fuzuilh. Ha neuze, goustadik-tre, sevel anezhi dreist ar voger vihan, ken na voe tu d'he gwelout eus an tu all. Hogos diouzhtu, e strakas'un tenn, hag e toullas ur bolod ar gasketenn. Stouiñ 'reas ar fuzuilh muioc'h c'hoazh, d'ober d'ar gasketenn kouezhañ er straed. Neuze, o kemer ar fuzuilh dre ar c'hreiz, e lezas e vrec'h kleiz a-istribilh, difiñv. Ur penna-dig goude, e lezas ar fuzuilh da gouezhañ er straed. En em lezel a reas neuze da risklañ war an doenn, o tegas e zorn kleiz warnañ e-unan.

O vont buan a-ruz war an tu kleiz e taolas

ur sell dreist ar voger. Deut oa an taol da vat. O welout ar gasketenn hag ar fuzuilh o tont en traoñ, e soñjas ar soudard all e oa deut a-benn da lazhañ an den. En e sav e oa aet, dirak ur renkennad siminal, peg e sell ouzh an doenn all. Spis e oa trolinenn e benn war skramm an oabl.

Ur mousc'hoarzh war e zremm, e savas ar sniper republikan e revolver, harp ouzh korn ar splad. Un daou-ugent metrad bennak dioutañ e oa egile : un taol diaes d'ober en amc'houlou, hag ur boan an tri mil diaoul en doa en e vrec'h. Pell e voe o viziñ. Krenañ a rae e zorn gant ar c'hoant da dennañ. Stardet e vuzelloù, e tennas don e anal dre e zivfron, hag e tennas. Hanter-bouzaret e voe gant an trouz hag un dazlamm a reas e vrec'h gant an taolkil.

Neuze teuziet ar maged, e taolas ur sell hag e laoskas ur youc'hadenn. Tizhet en doa e enebour. Stouet e oa dreist splad an doenn, war e dremenvan. Klask a rae derc'hel en e sav, met goustadik e riskle, evel en un huñvre. Mont a reas ar fuzuilh diouzh e zorn, tremen a reas dreist ar splad, skeiñ ouzh peul-arouez un troc'her-blev ha darlammat war ar riblenn.

O vervel, e plegas an den warnañ e-unan, ken e kouezhas, e gorf o treiñ hag o treiñ en aer a-barzh erruout war ar straed gant un trouz boud. Difiñv-mik e chomas neuze.

Sellout a rae ar sniper ouzh e enebour o kouezhañ. Skrijañ rae. Mervel a rae ennañ c'hoant ar brezel. Morc'hed a save ennañ, perlezenniñ a ra ar c'hwezenn war e dal. Hag eñ aet gwan

gant ar boan, ha gant skuizhder un devezh hir tremenet o c'hedal diwar an doenn, e savas re-veulzi ennañ pa welas korf friket e enebour. Stlakañ 'rae e zent. Kregiñ a reas da vesteo-
diñ gerioù hep ster ebet, da sakreal ouzh ar brezel, da sakreal outañ e-unan, da sakreal ouzh an holl.

Sellout a reas ouzh ar revolver o tivogediñ en e zorn hag, o sakreal, e taolas anezhañ gant nerzh e-harz e dreid. Leuskel a reas an arm un taol, hag en ur c'hwitellat e tremenas ur bolod tost d'e zremm. Spontet e voe, klask a reas terriñ d'e nervennoù. Mont a reas dioutañ gwa-
genn ar spont, hag e tarzhas da c'hoarzhin.

Tennañ 'reas ar voutailhig whisky eus e c'ho-
dell hag en ul lonkadenn e skarzhas anezhi. Gant nerzh an alkol en em sante bremañ diskuizh a-grenn. Ober a reas e soñj mont kuit alese, ha distreiñ d'e rujumant, da gontañ dezho doare an darvoudoù. Didrouz e oa pep tra en-
dro dezhañ. Ne oa ket mui kalz riskl da ziskenn ar straed. Dastum a reas e revolver evit la-
kaat anezhañ en e c'hodell. Neuze en em silas dre prenestr bihan an doenn evit mont tre en ti.

Pa erruas er straed e pegas ur frondenn ne-
vez ennañ. C'hoant en doe da welout dremm e enebour, dremm an hini en doa lazhet. Kavout a rae dezhañ en doa graet un taol kaer, forzh piv oa ar soudard marv. Marteze e anaveze ane-
zhañ. Marteze e oa bet en hevelep rujumant gantañ a-raok disrann an arme. Daoust d'ar riskl e reas e soñj mont war-du penn all O'Connell Street : eno oa an emgann bras, war e-
du-eñ e oa didrouz pep tra.

Ul lamm a reas a-dreuz ar straed. Dirazañ e tigoras ur vindrailherez ul linenn e godroñs an hent, hep e dizhout avat. Splujañ a reas e-kichen ar c'horf marv. Tewel a reas ar vin-
drailherez.

Neuze e troas ar c'horf marv. Hag e chomas peg e sell ouzh daoulagad e vreur.

(brezhoneg gant Herle DENEZ)

Leonard COHEN

PROF

Lavarout a rit din e vez an dilavar
tostoc'h ouzh ar peoc'h eget ar barzhonegoù
met ma tegasfen deoc'h,
evit prof, an dilavar
(rak gouzout a ran petra eo an dilavar)
e lavarfec'h :

Kement-se n'eo ket dilavar
Kement-se zo ur varzhoneg all

hag e rofec'h anezhañ din en-dro.

(troidigezh gant Herle DENEZ)

K. GIRAUDON

tarzh

Ne oa ket savet c'hoazh heol lentik ar beure
p'en em lakaas an tren da vont en-dro o frailhañ
yenijenn kriz ar mintin. An nevez-hañv a groge.
Beuzet e oa ar pradeier hag an torgennoù gant al
latar.

Ne oan ket dihonet mat c'hoazh hag e oan o
vezañ kaset war-raok trema ur bed nevez, disheñ-
vel diouzh hini ar pemdez. Klask a raen anavout
pezh a zamwelen dre ar prenestr met en aner :
al latar e pep lec'h a skramme ar maezioù.

Geunioù a dreuzas an tren, e-lec'h m'en em
veske an dour hag an oabl griz. Kregiñ a rae
an heol da reiñ luc'h tamm-ha-tamm d'an ec'hon-
derioù gleb. Goude bezañ troidellet dre ar vro-
se, dianav din e c'horrekaas an tren da chom a-
sav gant ur skrijadenn spontus.

Diskenn a ris ha pignat gant an hent a gase
d'an aod. Ma-unan e oan, ur sac'h war ma c'hein
hag em dorn, ur vazh. Sellout a raen spis a bep
tu, oc'h heuliañ koulskoude an hentig a gammi-
gelle betek ar meurvor. Hanter-bleget gant an
avel yen e kerzhen goustad pa glevis ur youc'ha-
denn degaset eus a-bell gant an avel.

Sed ma anavis ar paotr, Gwalldan e anv, a oa
o vale war ma lerc'h. E c'hortoz a ris ; hag,
eürus da vezañ en em gavet en-dro evit ar veaj
diwezhañ, e kendalc'hjomp gant ar wenodenn. Hor
c'has a reas d'an draezhenn. Ur vag a oa ouzh
hon gortoz a-ere ouzh ur garreg.

Warni e pignjomp hag o roeñviñ e voemp kaset
en donvor, luskellet gant houl ar mor glas. Evned

mor a droelle war hon tro o kas da bell o garmoù hir. War sioulaat ez ae an avel dre ma pellaemp diouzh an aod.

Lintrañ a rae an heol da vat ha tommder e vanoù a floure hor c'horfoù glebiet gant ar fru...

Un eurvezh oa e roeñvemp kalet pa weljomp an enez argadet gant ar mor kounnaret. Brav-spontus e oa, eviti da vezañ bras. Tridal a rae, e-kreiz ar mor gant skinoù sklaer an heol. Kurunennet e oa gant eon gwenn an tonnoù e penn ar c'herreg du.

Glas-mouk e oa en he c'hreiz gant ar gwez uhel. Un nebeut menezioù, melen gant goulou an heol, a save eno. Bez e oa un uheloc'h evit ar re all, a oa diazezet warnañ ur seurt neved gwenn evel sklerijennet eus an diabarzh.

Ne veze klevet nemet trouz ar mor o tarzhañ kreñv a-hed an aod. A-wechoù e c'harme un evnmor er pellder. Stagañ a ris ar vag ouzh ur roc'h hag e kemerjomp ur wenojenn strizh a sanke er c'hoadoù teñval, marellet gant an heol splann.

o o o o o

o o o

o

Bamet e oamp dirak kement a gaerded ha ne gavemp ger ebet evit displegañ pezh a santemp.

Ha neuze e weljomp un den o redek davedomp. Ur paotr e oa, gwisket gant ur sae wenn, noazh e dreid. Blev gell hir a ziskenne war e zivskoazh hag ur barv rous a lakae splann haelder e zremm. Ur mousc'hoarzh hegarat a roas deomp o kemenn e levez d'hon digemer.

Klask a ris komz met ne c'hellen ket distagañ ger ebet ken ! Tra iskis a c'hoarvezas ivez gant ma c'heneil hag e komprenjomp ne oa ket implijet al lavar amañ.

Ken haël e oa e zremm, ken don e selloù ma seblante din dreistnatur an den-se. Divinout a reas ma soñjoù rak ur sell a daolas din, ken leun a wirionez ma ne c'hellin biken e dennañ eus ma eñvor. Ha bremañ c'hoazh e skrij ma spered o soñjal en-dro er sell "tredanel" a reas din pa erruen. Hevelep menoz a oa gant Gwalldan.

O terc'hel gant an hentig e tizhjomp, warlerc'h un dorgenn, ur frankizenn c'hlas glizhennet kaer gant दौरaer an nevez-hañ... O tiskenn en draonienn e tizoloemp tiez gwenn - a vez gwelet alies e Bro-Spagn - hag en em guzhe en-traoñ. Digouezh a rejomp en ur prad leun a foeon hag a vleunioù nevez a enaoue glasder ar geot.

Sed ma erruas ur bagad merc'hed, saeoù gwenn ganto, o blev melenn o nijal en avel flour, mibin, o tont davedomp en ur c'hoarzhin.

Dalc'hmat ne veze rannet grik kenetrejomp, met en em gompren a raemp mat-tre, gwelloc'h zo-ken evit al lavar ken touellus ha trubard... Tredan ha tan a lamme diouzh o daoulagad boull. En em lakaat a rejont da stoufiñ dirazomp ha pokat d'hon zreid...

Mont a rejomp tre en ti brasañ, gwenn-flamm e dal dindan an heol a oa krog gantañ krazal. Ar sal, e-lec'h ma tegouezhjomp a oa gwer, rak leun a blant a bep seurt, raden, jisami o vroñsaat, iliav-red a c'holoe mogerioù ar sal. Al lodenn vrasañ anezhi a oa leuniet gant ur poull-dour boull ha damc'hlas, korriganed an heol o

tañsellat ennañ. Pedet e voemp da vont e-barzh d'en em netaat. Gwalc'het e voemp gant mor-vor-ganed a oa splujet en dour gant froñdoù trelatus a voe skuilhet warnomp. Roet e voe deomp saeoù gwenn ha kaset e voemp er sal e-kichen.

Bras meurbet e oa houmañ ha damc'houlouet gant un nebeut piledoù-koar. Azezet e oa an holl war pallennoù pe dorchenoù war al leur. Tresa-denoù dispar a oa bet livet war ar mogerioù hag adskeudoù kevrinus ar sklerijenn a lakae buhez enno.

Sioulded a save diouti ; an holl a c'hortoze didrouz. Neuze e krogas mouskan ur fudil a droi-delle flour en-dro deomp. Ha setu ma tarzhas sonerezh un delenn a strobinnelle an holl spere-doù. Ur fleütig a evlas anezhi o c'hoari un ton diaoulek hag a voe eilet ivez, gant ur vombard skiltr. Sonerezh dispar a strinke bremañ eus kalz a delennoù all, a stleje breoù da bep hini, abafet e spered. Biskoazh ne oa bet klevet sonerezh ken burzhudus ha ken marzhus, gant al levez e leñve Gwalldan. E-pad pell e voemp beuzet evelse e strobinnell an tonioù... Pa voe skuizh-marv ar sonerien e ehanas ar gensonadeg ken brav-se...

o o o o o

o o o

o

Goude bezañ sonet ha selaouet ez eas an holl da gousket, lod en ur gwele-skourr e disheol ar gwez-sapr, lod all war ballennoù ledet war al leton dindan tommder an heol. En em serrin a rae ma zaoulagad gant tommder pounner an heol.

Sed ma krogis gant ur wallhuñvre am c'hasas

en-dro en tu all d'ar meurvor er bed kentañ, trist ha laouen war un dro... hag e soñjis en-dro er vuhez am boa renet ennañ, amzer vak ma bugaleaj, drantiz ha kounnar ma yaouankiz ha nerzh ar stourm am boa kaset war-raok en desped da bep harzh am bao kavet.

Soñj am boa eus divlas ar vuhez pemdeziek trubuilhet gant trouz spontus ar c'herioù bras, o c'hwezh put ha me o redek dibaouez o sentif aketus ouzh un dra bihan, niverennoù warni, a oa staget ma arzorn hag a droe hep ehan : an amzer oa graet anezhi ; peadra da drein sot ! Ha ne ouijen ket larout ma oa yac'h c'hoazh ma spered p'am eus kuitaet an ifern-se. Amañ e oa echu gant dalc'h start an amzer. Ne oa ket anezhi ken. Ken sklav e oa an den ganti en tu all !

Met a-enep da se e talc'hen soñj eus pennadoù a eurusted am boa anavet e-touez ma c'heneiled pa c'hoarzhemp dirak ur banne chistr en nozioù du, pe gant keneilezed koant pa derc'hemp kuit da arvestin an heol o vont da gousk er c'hornog.

Soñj am boa ivez eus endervezhioù glac'har, a velkoni hag a c'hwervoni a goeñve hon daoulagad a zaeroù bervus dirak krizder ar bed.

Oc'h advevañ e oan pennadoù eus ma buhez pa voen dihonet trumm gant Gwalldan a oa deut d'am c'herc'hat. Lenn a ris er sell a reas din en doa bet ur "wallhuñvre" damheñvel ouzh ma hini. Pebezh burzhud ! Ne oa ket ezhomm ken eus al lavar. Aes-kenañ e oa en em gompren hep un disterañ gerig. Er c'hontrol zoken, e stage ma ene d'ur seurt ebarzherezh am lakae e darempred gant ene an hini all. Posubl e oa en em lakaat e plas an nesañ hag hen gompren.

Merzout a ris e oa gleb c'hoazh daoulagad Gwalldan da-heul e wallhuñvre hag e santen e oa fromet kalz e galon gant kement-se. Fromet e oan ivez o kompren am boa kuitaet da viken ar bed ken iskis-se, lirzhin ha trist war un dro. Evel ur ganevedenn a save en hor c'halonoù, hejañ a ris ma fenn o vousec'hoarzhin hag e kasas din ur stlapad war ma c'hein.

Tarzh ar mor a rae e reuz a-bell. Sed ma rejomp gant ar re all a oa prest da vont da vale. Heuliañ a rejomp neuze, ur froud treuzwelus a gase d'ur c'hoad glas e-traoñ an draonienn. Pegen glan e oa al lec'h-mañ ! Nevez trouz nemet bourbouilhadez an dour. Da-heul un neudenn e tiskenne a-serzh ar froud ha sed ma tegouezhjomp dirak ul lammdour eonek a spluje en un islonk. Bleunioù o doa kresket dizaon war e ribl. Azezañ a reas an holl, bamet gant kement a gaerder.

o o o o o
o o o
o

Pa guzhas an heol a-dreñv d'ur menez, e savas an holl da zistreiñ en draonienn. Kerzhed e vez goustat-tre, met e-lec'h diskenn war-du an draonienn e pignjomp davet krec'h ar menez uhelañ.

Treuziñ a rejomp koadoù don, enno laboused o richanañ d'ar c'huzh-heol. Bez e voe ivez pradoù glas dasstrewet gant bleunioù a bep seurt. Ar merc'hed a zastume ar muiañ ma c'hellent - kement ha ma oa - hag a-dolpadoù e kasjont anezho davet krec'h ar menez, a oa un neved savet war-nañ.

En em sankañ a rae goustadik an heol ruz-flamm e-barzh an dour, en dremmwel. Ar meurvor a oa

entanet gant e skleurioù. Pignat a rae al loar e barr an oabl hag e oa krog gant ar steredenoù en em enaouiñ.

Dirak ur savadur teñval e errujomp. Eus an diabarzh e teue ur skleurig disliv-tre. Mont a rejomp tre, holl. Raktal e voemp splujet en ur sal hir-tre, gant pileroù maen a harpe treustoù koad tev. E maen e oa ivez ar mogerioù. E penn ar sal e horjelle ur goulaouig gwan. Tud all a oa diazezet dija, lod war an daoulin, lod all astennet war al leur. Chom a raent difiñv ha didrouz oc'h hirarvestiñ ur pikol gweenn daoulagad don gantañ, ha muzelloù o vousec'hoarzhin, a oa staget a-ispilh ouzh ar goulaouig.

Pebezh trivliad a savas ennon. Skoachañ a ris e korn ur piler hag e chomis bamet o prederiañ.

Goude ur pennad amzer, e verzis ur c'hemm em spered ha tamm-ha-tamm e teuas din emskiant ma buhez kentañ hag ivez buhez ar re garet. Kilañ a c'hellen ober en amzer hag adwelout a ris ma zud, ma c'heneiled, ma bro, ar bed holl... Hag e chomis a-sav en deiz ma anavis Gwalldan - a oa em c'hichen - hag en em gavout a reas hon eneoù. Advevañ a rejomp asamblez kement tra hor boa bevet o vousec'hoarzhin hag o ouelañ an eil hag egile. E-giz ur fiñvskeudenn e tibune an amzer war skramm ma emskiant.

Adwelout a ris an ti, harpet ouzh pantenn un dorgenn, e-lec'h ma oan bet ganet ha bet desavet gant ma zud.

Drantiz ma bugaleaj a dremenis o c'haloupat ar maezioù, o c'haoliat ar froudoù a widile e kuzh ar man, o terriñ ma sec'hed gant strink ur stivell dindan ar raden.

Koulskoude ne raen nemet arvestiñ ha n'eo ket advevañ an eñvorennoù a save diouzh ma spered. Meizañ a raen diwarno.

Horjellerezh ar goulaouig a oa ken gwan ken e lakae an holl bileroù maen hag ar mogerioù da vranñsellat. Pep tra a drabinelle. Leun a beoc'h e oa ma c'halon. En em skuilhet e oa an noz war an enez da vat. Sed ma krogas an avel da c'hwezhañ spontus. Met souezhusañ tra ! E diabarzh an neved eo e voe krog ganti troidellañ !

An holl o doa savet o fenn. Kerkent e voe klevet strink un delenn o vont war gresk. Gorrek e stagas ur skleur da dridal muioc'h-mui. Ken trellus e teuas da vezañ ken e voe ret din serrañ ma zaoulagad.

E-keit ma lugerne ar goulou hag e tarzhe strinkadennoù an delenn, e c'hwezhe kreñvoc'h-kreñvañ an avel. Mouezhioù merc'hed a eile skañv dañs an delenn.

Mezvellet e oa an holl ha stouñ a raent. Ober a ris kement-all. Ul luc'hedenn a stlakas hag e yeas pep tra war sioulaat.

N'oufen ket larout pezh am eus santet don ennon, ken dreist e oa. Ur c'horf nevez eo am boa kemeret ; skañv-tre e-giz ul labous en em santen, dieub eus pouez pounner an hini kentañ. Barrek e oan evelse da nijal dre bep lec'h hep harzh ebet ken !

•••••
•••
•

Pa voe echu e tistrojomp d'an ti, e goudor an draonienn. Degemeret e voemp da vat gant ar

re all, evel kenseurterd nevez krog da vevañ asamblez ganto betek Doue 'oar pevare...

Dañsal a rejomp hir amzer tro-dro d'an tan a strake e yenijenn an noz du. Ar merc'hed hag ar baotred a oa aze a oa karantezus holl. Darempredoù eeun a savas kenetrezomp. Skuilhet e voe kalz a chouchenn ha dañset meur a blin.

Pa echuas an tantad e stage an alc'houedenn da gornigellat a-us d'ar menezioù da gemenn d'an holl e oa deut en-dro an tarzhan-deiz kenedus.

•••••
•••
•

Gwalldan a sellas ouzhin hag e tivinis en e zaoulagad tarzhan eürusted, ken c'hoantaet, abaoe keit-all gant mabden. Neuze e vousec'hoarzh as an heol en ec'honder divent hag e tirollas ar mor war hor bag, chomet hec'h unan war an draezhenn, a splujas e spoum an dour...

(23-03-1977)

Koumanantit da SKRID !

Koumanant evit 4 niverenn : 30 lur.

Kas da : P. Denis, Le Ris, Ploare

29100 Douarnenez

CCP : P. Denis 1499-51 RENNES

Kas ar skridoù ha pep tra da embann d'ar

rener :

Gwendal DENEZ, Ri, Ploare, 29100 Douarnenez.

S K R I D

Kelaouenn diskleriet hervez lezenn.

Eil trimiziad 1977

Moulet e C.L.L. Roazhon.

Merour : Per Denez.

